

21
EMGANN
PONDI



EMGANN PONDI

Komzoù gant YOUENN GWERNIG

Sonerezh gant POLIG MONJARRET

(pe war don « Gwerz Kêr-Is »).

♩. = 80

pe-tra 'zo ne-vez e Pon-di, pe-tra 'zo ne-vez e Pondi,
 pe-tra 'zo ne-vez e Pondi, Pa glevan 'dro d'ar Pre-fe-di,
 troula-la-la, troula-la-lo Pa glevan 'dro d'ar Pre-fe-di,
 troula-la-la-le-no.

I

Petra 'zo nevez e Pondi (**Teir gwech**)
 Pa glevan 'dro d'ar Prefedi,
Trou la la la, Trou la la lo !
 Pa glevan 'dro d'ar Prefedi,
Trou la la la la lé no.

II

'vel ar mor bras o kounnari,
 Youc'hadennoù ha cholori ?

III

Va mabig kaez, 'pez a gleves
 N'eo ket an tarzoù war an traез

IV

Met pemp miliard tud diwar 'maez
 O lopian war ar C.R.S.



V

'n Aotrou Prefed a lavare :
« La Loi ici faut respecter


VI

« **Moi je vas vous les fout' aux fess's**
« **Mes bataillons de C.R.S. »**




VII

Ar Ber a respont d'ar Prefed :
« Hor viou da vreinan 'zo chomet,



VIII

« Ganto ni c'hello mar kares
« Siri boutoù d'ar C.R.S.



IX


« An archerien n'int ket tud fall
« Diouto den ebet en em jal,

X

« Met diouzh ar C.R.S. daonet
« Hon dilivrit, Aotrou Prefed !

XI

« Kas anezo d'an Aljiri
« Evel-se e c'hellan toui



XII

« Ne vint ket taolet er Blaët
« D'ampoezoni tout ar pesked !



ALGÉRIE + FLN = PLAN de CONSTANTINE

BRETAGNE + FIDÉLITÉ = ZERO

Nous voulons

UNE LOI-PROGRAMME

POUR LA BRETAGNE



EDITIONS « AR SONER » — 18, Boulevard Joffre — LORIENT

Supplément du N° 123 AR SONER — C.C.C.P. N° 1436 - 15

Imp. LA LIBERTE, Lorient